



Chapel Koatkeo, e Skrignag.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

10^{vet} Bloavez maro an Ao. Perrot

(12-12-1943 - 12-12-1953)

Niv. 66 (Mensuel)
Abonnement : 500 Francs

KERZU 1953

Paeit ho koumanant 1953

Ar re n'o deus ket paet o c'houmanant 1953 a resevo arak Nedeleg eul lizer, ha goude, eur paper-arc'hant (mandat) ma ne baeont ket. Ma resevit eur paper-arc'hant digant ar fakteur, paeit d'ezañ raktal.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Koumanant madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : **V. SEITE, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère).**
C.C.P. 544.22 Nantes.

Kas ar skridou da : **M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de St-Renan (Finist.).**

Ma karit an ao. Perrot, paeit ho koumanant ha klaskit d'eomp iennerien nevez.

TAOLENN

E kol ar boan	2
An ao. Perrot, beleg	4
Sin an amzeriou	6
An ao. Perrot, eun dihuner	7
An ao. Perrot, eur sklerijenn hag eur galon aour	9
E koun an ao. Perrot	11
Levenez en Neñv	15
A dreuz skridou ao. Perrot	17
an ao. Perrot ha Buhez ar Sent,	
an ao. Perrot ha Landevenneg,	
an ao. Perrot adsaver chapelioù	18
an ao. Perrot abostol Breiz	19
abostol Feiz ha Breiz,	
war roudou hon Tadou	
an ao. Perrot ar poanier	20
Prezegenn an ao. 'n Eskob Duparc	22
Buhez an ao. Perrot	23
Eun den a zoare	24

War ar golo : Chapel Koatkeo bet savet gant an Ao. Perrot.
E vez a zo e-kichen ar prenestr a weler en tu kleiz.

An darn vuia eus ar o'hlichedou a zo er gelaouenn a zo bet digant Herri Gaoissin.



Yann-Vari PERROT

Person Skrignag, oberour « Buhez ar Sent »,
rener « Feiz ha Breiz » ha Tad ar « Bleun-Brug ».

E SKOL AR BOAN

Ar bloaz koz a zo o vont da echui. D'eomp holl, en deus digaset muioc'h pe nebeutoc'h a boan. Ar bloaz nevez, ma plij gant Doue hen rei d'eomp, ne esperno ket ac'hanomp war ar poent-se kennebeut. Karout a rafemp ober vad d'hol lennerien, o rei d'ezo da glevet kenteliou an Ao. Perrot diwar-benn ar boan, kenteliou eun den hag a zo bet gwasket gant ar boan, mar deus unan.

Ar boan a zo eun dra red : ar re goz hen anavez mat : ar re yaouank o deus he gwelet meur a wech hag ar bugel bihan a-unan en deus graet anacoudegez ganti a-raok m'eo gouest da lavaret e pelec'h emañ e boan.

Eur skrivagner gall ha n'eo ket gouest da gomz nag eus eun den nag eus eun dra, hep kaout abeg ennañ, a embanne e oa ar boan eun dra iskiz, eun dra ha n'oa ket dleet e vije anezi er bed-mañ.

Hep mar ebet, Doue n'en deus ket krouet an den evit ar boan ; Doue n'en deus ket krouet ar boan ; hon tud kenta eo o deus digoret d'ar boan dor ar bed-mañ, p'o deus digoret dor o c'halon d'ar pec'hed ; int-i eo o deus chachet ar boan war o c'hein hag abaoe, ar boan, ganet gant ar c'horf, a gerz d'e heul hag a deu a-benn anezañ.

Kaer o devezo ar fals-doktored skañvbenni, ar boan a bado keit hag ar bed hag e lec'h drouk-prezeg anezi, gwella tra hon eus da ober eo gwelet petra dalv.



Ar boan a zo eun dra hag a ra vad d'an den, evel ma ra vad da bep tra. Ar boan a ra vad d'an douar ; tommder ha yenien a zo traou poan ; evit beza mat, koulskoude, ez e red e vefe tomm bras en hañv ha yen bras er goañv ; abenn rei eostou mat, a lavare ar re goz, an douar a rank mervel diou wech ar bloaz : mervel devet gand an heol, en hañv, ha mervel suilhet gant ar skourm er goañv.

Ar mor, ma chomfe hep finval, a deufe dizale da veza eun dour treñk, gouest da hada ar maro, dre ar bed-holl, met an Aotrou Doue hen hej hag hen dihej, her stlap diwar ar garreg-mañ war ar garreg-hont, ha dre ma vez, en doare-ze, loc'het ha diloc'het, e kendalc'h da veza eun dour a vuhez hag eun eienenn a binvidigez.

Ar boan, koulz lavaret, a ra vad d'ar mor...

Klevet em eus gwechall, e ti va zud, ar gomz guir bater-mañ : « Bremañ ne vez graet mui nemet traou diwar-sav ! » da lavaret eo traou brao da welet, diwar c'horre, met traou hag o deus, e gwirionez, nebeud a dalvoudegez, traou ha ne badont ket.

Perak ? Aoun o devoa bet, ar re o grae, rak ar boan hag an traou bras, kaer ha padus e ranker kemeret amzer ha poan evid o ober.

Ar pezh a zigouez gant an traou a zo en-dro d'an den a zigouez ivez gand an den, e-unan ; an den ne deu da veza den a-walc'h nemet poan en defe bet, nemet e skol ar boan e vefe bet savet, nemet kizellet e vefe bet gant kizell ar boan.

An dud o deus lezet ar roudou dounna war o lerc'h, er bed-mañ, n'eo ket e skol ar blijadur eo ez int bet savet, met e skol ar boan. Gwelit sant Paol, petra oa ?

Eun denig distar, n'en devoa ket kalz euspenn tri droatad ; bec'h d'ezañ gwelet sklêr, hanter-amzer ; ret d'ezañ ober ar gwiader evit gounit e vara, ar pezh n'en deus ket miret outañ, ken harpet ha ma oa gant gras Doue, da veza prezeger ar wirionez ha doktor ar bayaned.

E skol ar boan e teuas da veza eun den, evel ma n'eus ket bet kalz evel-dañ war an douar.

« Divergli a ra 'n houarn en tan,
« An den n'eo den anez kaout poan ! »

Ha ma ra vad ar boan d'an den evit ar pezh a zell ouz ar bed-mañ, e ra vad d'ezañ, dreist-holl, evit ar pezh a zell ouz ar bed-all. Hi eo a laka an den da dostaat ouz Doue, evel m'hen desk d'eomp bemdez ar skiant-prena.

Nak a bet ne welomp-ni ket, en-dra ma welont pep tra o vont, hervez o c'hoant, oc'h ankounac'hât hent o iliz, o klask er grouadurien, plijaduriou difennet hag o tizrei ouz an Aotrou Doue kerkent ha m'en deus bet ar vadelez d'o skei gant birou ar boan !

Ar boan a zo evel eur c'haead drez ha spenn savet gant Doue en e vadelez, e-kreiz hent bras an ifern da welet hag hen a c'hello miret ouz ar pec'her paour da gerzet pelloc'h varnañ ; hi eo a laka an den da zont ennañ e-unan hag a ra d'ezañ lavaret, evel ar mab foran : « Sevel a rin ; dizrei a rin da di va zad ! »

An dud wella eo ar re a vez tenna o buhez war an douar-mañ ; etouez ar muia drein emañ ar brava roz.



Ret eo gouzout tenna talvoudegez eus hor poaniou.

Eleiz a zo hag o deus poan hag a goll o foan dre ma n'he gouzañvont ket heb en em glemm ha dre ma ne zigasont gwellaenn ebet en o buhez.

An doktor bras sant Augustin a lavare da gristenien e amzer : « Koll a rit ho poaniou rak ne ouezit ket tenna talvoudegez anezo. »

Hent ar groaz eo hent ar baradoz ; ar groaz eo skeul ar baradoz ; ra zougo pep hini e hini, heb en em glemm ; Doue ne laka kroaz re bounner ebet war diouiskoaz den !

Leveromp eta, beb an amzer, a greiz kalon, ar c'homzou-mañ, a lavare gwechall ar roue David : « Derveziou 'zo bet hag ho peus hon diskaret izela ma c'hellec'h hen ober, mat eo ! ya, laouen ! mat ho peus graet ! »

Rak c'houi ne glaskit nemet hor brasa mad ha ne c'hloazit nemet evit gwellaat ; ne zammit ket an den en tu all d'ar pezh ma 'z eo gouest da zougen, hag evel m'oc'h deuet gwechall war zikour sant Paol en e drubuilhou, ha ma lavarec'h d'ezañ : « Harp a-walc'h az peus gant va gras ! » e teuit bemdez ivez bremañ war zikour kement hini eus ho pugale a en em gav er boan, dal m'en em dro warzu ennoc'h : bennoz d'eoc'h eta, Tad trugarezus meurbed, c'houi hag a oar hor frealzi ker brao en hon holl drubuilhou, bennoz d'eoc'h ha meuleudi da virviken,

Y.-V. Perrot (F. h. B. 2-1939).

An Aotrou Perrot, beleg

Buan ez a an amzer en-dro.

Setu dek vloaz tremenet, er miz-man, abaoe maro trubuilhus an Ao. Yann-Vari Perrot. Hor c'helaouenn hag a labour war an dachenn, bet digoret gantan, tost da hanterkant vloaz 'zo, ne c'hell ket chom heb ober meneg anezan.

An niverenn-man a garfe lakaat, a-nevez dirak daoulagad hol lennerien, skeudenn e zremm karet.

E damm buhez, an Ao. Perrot en deus he gouestlet penn da benn da Feiz ha Breiz.

Feiz ha Breiz, oa boaz da lavaret, a zo daou ano hag a dle chom skoulmet keit ha ma yelo ar bed en-dro.

E c'her hag e bedenn a zo bet : « Doue ra viro Breiz gant he feiz hag he yez, rak hep brezoneg, n'eus Breiz ebet da virviken ».

Tamallet eo bet an Ao. Perrot, gant tud berrwelet, ha ne anaient, nag e skridou nag e galon, da veza poaniet muioc'h gant Breiz eget gant ar Feiz. Eur fazi eo hag eun displeget !

Ar wirionez eo, hag e-unan en deus he diskleriet en e skridou, oa bet karget eus tachenn Breiz, e Feiz ha Breiz.

Kement-se n'en deus ket miret outañ da veza, en e garg a veleg, koulz hag en e garg a skrivagner, unan eus brasa ha gouizieka ebetel ar Feiz eus e amzer.

O, her gouzout a ran, n'eo ket bet klevet gwall alies o prezeg er misionou, en ilizou bras, lec'hioù-pelerinaj an eskopti. Sammet e veze atao a labour ha ne garfe ket en em ziskouez na mont pell diouz ar gêr.

Al labour bouezusa en deus graet evit sklerijenna feiz e genvroiz eo e *Levr Buhez ar Zent*, embannet e penn kenta 1911. Ennan e kaver ar pep wella eus ar pezh a oa en e galon hag en e spered a veleg breizat :

« O sevel ar vuhez ar zent nevez-mañ, a skrive er bajenn genta, ne glas-kan nemet eun dra, ho lakaat da gredi muioc'h mui e Jezuz Krist ha da reizha ho puhez gwelloc'h gwella war e hini, evel m'odeus graet kerkoulz an holl zent en hor raok... »

O komz diwar-benn *Levr Buhez ar Zent* an Ao. Perrot, ar ehaloni Cardinal, bet diaraok e berson, e Sant Nonga, ha d'an ampoent, Renner ti ar veleien goz, e Kastel, a lavare da lennerien *Feiz ha Breiz* : « N'eus hini ebet ac'hanoc'h ha na ve mall gantañ kaout en e di eul levr eus ar seurt talvoudegez. Holl gwirioneziou ar relijion a zo displeget ennañ en eun doare dispar, evel ma oar ober an Ao. Perrot... »

Ar gentel da denna a gaver, bemdez, da heul buhez ar sant a zo enni eur gelennadurez veo, karget a binvidigez ene, aozet a-grenn evit sperejou breizat.

En unan eus ar c'hentelioù-se, e lennomp kement-mañ : « Ma sellit ouz buhez ar zent, ma taremperdit ar zent, e vezoc'h kelennet gant ar zent, e vezoc'h skoazellet gant ar zent... »

O veza darempredet ar zent hag evesaet ker mat ouz o buhez, an Ao. Perrot en doa desket skiant ar zent, ar skiant-se a roe kement a zaour hag a nerz d'e brezegennou ha d'e skridou, a gaver enno komzou kaera, Tadou an Iliz, ha, dreist-holl, re Sant Augustin, a garfe ober meneg anezañ ken alies.

E skol sent Breiz, a boanias kement da lakaat anaout gwelloc'h, e teskas e unan anaout gwelloc'h bro e gavel gant he chapelioù, he feunteunioù, he c'hâlvarioù. Souezus eo an holl draou a ouie diwar o fenn !

Eun dudi e-veze e glevet oc'h ober ar brezegenn da geñver pardon unan pe unan eus sent Breiz. Mard' oa devot bras da sent koz hor bro, ez oa ken devot all d'an Itron Varia ha da Zantez Anna. N'en deus ket ehanet da ziskouez e fizians hag e garantez tener evito lia da zougen e genvroiz da vale war o roudou.

Ar *Folgoat* ha *Santez Anna Wened* eo al lec'hioù santel o deus ar muia laketa e galon da dridal. Karget aus retrejou ar baotred yaouank, galvet da vont d'ar servich, gant pebez joa e teue ganto d'ar *Folgoat* evit o gouestla d'o mamm eus an neñv. E-harz he skeudenn venniget, araok kimiada, e roe d'ezo e aliou diweza : « Grit enor e pep lec'h da barrez ho padiziant, bezit er-mêz eus ar gêr ar pezh ma oac'h dindan daoulagad ho tud. Bezit soudarded kalonek ha kristenien dispont, bevit hepred e gras Doue, krog e dorn ar Werc'hez... Karit war eun dro ho Pro hag ho Toue. An diou garantez-se a zo graet evit chom atao unanet. Evel diou steredenn e sklerijennint hag e tommint ac'hanoc'h war hent strafilhus ar vuhez... »

Eur c'holl bras eo bet, e c'heller lavaret, n'en defe ket an Ao. Perrot skrivet muioc'h diwar-benn ar Feiz. Al labour-se a oa bet fiziet er re all. Kerse eo !

An nebeut prezegennoù, a gaver, amañ hag a-hont, a-dreuz Feiz ha Breiz, bet displeget gantañ er parrezioù, er Bleun Brug, e Radio Roazon, koulz hag ar pennadoù, bet skrivet, a viz da viz, a ziskouez d'eomp pebez kalon virvidik a lamme en e greiz ha pegement a draou a oa renket en e benn.

Pec'hed eo lezel teñzor prezegennoù eun den ken helavar da loueda. Daoust pegen izel eo kouezet ar brezoneg, kavet e ve c'hoaz, posuve, gwir Vretoned a-walc'h da brena al levr a-bouez a vije gelllet da ober ganto.

Ne echufenn ket, ma rankfenn lavaret kement en deus graet ar Ao. Perrot evit kentelia ar baotred yaouank e parrezioù Sant Nonga ha Plougerne... ar pezh a c'hoantae ober evit ma vije adsavet manati Landevenneg...

Er poz diweza eus ar c'hantig kaer : « *Beleg da viken* » savet gantañ, en e yaouankiz ha bet kanet, moarvat, da zeiz e oferenn genta, e kaver ar bedenn-mañ da Sant Patron an Eskopti :

« Harpit ho peleg yaouank... »

« Ma c'hello war ho roudou, hed e vuhez, kerzet »

« Ha skignañ 'r feiz er vro-mañ ho peus kement karet. »

Diskleria 'c'heller, hep kaout aop da fazia, eo bet selaouet ar bedenn-se hag eo bet an Ao. Yann-Vari Perrot eur c'houlouenn skedus evit e genvroiz, goulaouenn hag he deus diskouezet d'ezo splann, hent ar baradoz, e kreiz teñvalijenn ar bed-mañ.

L. B.



An ao. Perrot gant e vugale skol katekiz.

Sin an amzeriou

Re vras eo bet personelezh an Aotrou Perrot, labourer en deus war re a dachennou war eun dro, evit na dalvezfe ket e varo ivez e meur a stumm hag e meur a geñver. Mar klasker koulskoude lavarout, e berr gomzou, petra o deus e enebourien c'hoantaet laza ennañ gant o zennou ganas, eo Breiz a-bez, evel m'eo bet gwechall, evel ma felle dezañ e vefe da viken, kristen rik ha breton da vat. Ha setu ar pezh a oa bet anat d'an holl, dioustu : ar vuntrerien a felle dezo laza an tan a oa ennañ, hag a oa evit o labour-int, eun tamall diaes da c'houzañv.

Gant an amzer n'en deus graet maro an Aotrou Perrot nemet kemer muioc'h a dalvoudegezh. Muioc'h mui e tes da veza sklaer e labour evit ar Gristeniez da gement hini a fell dezañ difenn an den gant kement a zo anezañ : hag e Breiz, an den eo ar breizad. Pa welan war estajerenn va levraoueg, ar ridennad levrennoù Feiz ha Breiz am eus laketa da veza keinet e ruz e soñj eus maro an oberour, e vuzulian al labour divent, pe gentoc'h eun tamm eus al labour divent en deus an aotrou Perrot kaset da benn en e vuhez. Embann kement-se, beza digor a spered hag a galon da holl ezommou ar vro, o kas war-raok e-pad keit-se, goueliou ar Bleun-Brug hag al labour parrez, a zo a-benn ar fin muioc'h eget souezus, eslammus ! Ha pa blijfe da dud 'zo ober eus an Aotrou Perrot eur beleg evel ar re all, ha netra ken, e krog ennon c'hoant da c'hoarzin mesket gant c'hoant fulori. N'hon eus ket bet ha n'hor bo ket kalz eveltañ hag a vo Breiz o vev en o c'halon, hag a vo eur Vreiz veo anezo, rak eur vro n'eus anezi nemet e spered hag e kalon an dud : n'eus Breiz ebet en diavaez d'ar Vretoned.

Met n'eo ket-se hepken a fell d'ha lavarout. Hen gouzout a ran, kaer eo dija beza eun den penn-kil-ha-troad, gant menozioù ; kaer eo beza eun den o tifenn anezo groñs, hep kila dirak hini ebet. Kement a dud a zo war an douar a zo prest bepred, muioc'h eget biskoaz, da veska ar pezh a gredont gant ar pezh na gredont ket, war zigarez chom hep sponta an dud. Evit an aotrou Perrot, difenn Breiz a oa en em zifenn, beleg breton. Santout a rae n'hall ket ar relijion beva er c'houmoul, met e kustumou, e doareou ar vuhez pemdeziek. Ha gouzout a rae ivez e oa bet stummet Breiz betek-henn gant ar spered kristen, hag e oa darempred don etre an eil hag egile, e oa buhez o vont eus an eil d'egile. Ha pa vele tud 'zo e touez ar Gristenien, e-touez ar veleien, o klask terri al liamm-se, evit mont d'eur relijion digor, neñvel, pe reou all o tivrezonekaat, o nac'ha Breiz, e krie dezo e oa eun torfed, eur fazi. Ne lavaromp ket traou all bremañ c'hoaz : rak al labour distruja a gendalc'h atao dindan hon daoulagad, ha n'ouzomp ket daoust hag e c'hellimp diwall abred awalc'h na ve kaset pep tra da goll.

Ha koulskoude. Evel ma vijent bet lavaret a-zevri kaer evit diskouez e oa mat e labour, eo deuet evit ar bloaz, komzou hon Tad Santel ar Pab e-unan da ziskouez e oa aet an aotrou Perrot gant an hent mat, evel pa lavarfe Pi XII dezañ : Ganeoc'h emañ ar wirionez (1). Emañ gant ar re a glask staga an den ouz e vro, ouz e zouar, ouz buhez tremenet e dadou, ha n'eo ket gant ar re a fell dezo e vije an holl hañval mik en o doareou diavaez hag en o stummspered. Labourat hizio evit ar Folklor e Breiz, evit ar spered broadel, a zo savetei an den eus an danvez, eus ar bed mekaniket. Ret eo dibab : met kement hini a nac'h spered Breiz, a zo dija en em lakaet a du gant ar Stad skrap-peptra, emañ dija a-du gant ar mekanik a gas an den betek « l'Etat concentrationnaire ».

Maodez Glanndour.

(1) Sellout ouz prezegenn hon Tad Santel ar Pab diwar-beinn ar Folklor, embannet gant « La Croix » 1-8-53, ha Bleun-Brug '63.



An ao. Perrot e barr e vrud.

An Aotrou Perrot, eun dihunter

Petra 'm eus bet digant an ao. Perrot ?

AOTROU RENER,

Bennoz Doue d'eoc'h da veza roet d'in tro da verka, en hor c'helaouenn, va anaoudegezh vat d'an Ao. Perrot ! Hen ober a rin gant plijadur, met ive gant keuz d'an amzer am eus tremenet gantañ « war gribenn ar menez ».

Bez' e c'hellan, a gav d'in, en em lakaat da ziskibl d'an Ao. Perrot. Kement hini a soñj kement-mañ : « *Hep brezoneg, n'eus Breiz ebet* » a c'hell en em lakaat da ziskibl d'an Ao. Perrot. Lavarout avat e ran enor d'am Mestr a vije mont eun tamm brao re bell.

An Ao. Perrot en deus hadet kalz, met n'en deus eostet nemet e-touez an dud a zo troet gant traou ar spered. Pa ris anaoudegezh gant « *Feiz ha Breiz* » n'edon c'hoaz nemet 12 vloaz, ha ne raen ket kalz a van ouz ar pennadou sinet gant an Ao. Perrot. Ar peurrest avat a blij e d'in kenañ. Ma ne vijen ket bet neuze

war ar studi, n'am dije ket kendalc'hiet pell, sur a-walc'h, da lenn « *Feiz ha Breiz* ». Met war ar studi edon, hag an nebeud kenteliou war ar brezoneg a veze roet d'in, dre douez al latin, ar gresianeg hag ar galleg, a rae d'in eur blijadur divent.

Met ret e voe d'in gortoz ar bloavezh 1936 a-barz beza « dihunet ». Er bloavezh-se, en eun taol kont, e ris anaoudegezh gant *Istor ar Vretoned*, da lavarout eo gant an diverra anezañ. Bez' e c'hellan lavarout e tigoras neuze va daoulagad war eur bed : hiviziken ne vijen mui an hevelep den. Dija e raen anaoudegezh gant dremm wirion va *Breiz* ! Er bloavezh-se ivez ec'h embanne an Ao. Perrot pennadou *Meven Mordiern* diwar-benn ar stourm evit ar brezoneg. Eur *Bobl*, eur *Yez*, a garen bremañ gant an hevelep karantez.

E miz Meurs 1936, an Ao. Perrot a lake eur stagadenn en e « *Feiz ha Breiz* » evit goulenn rakprenerien d'eul levr war ar brezoneg : *La Langue bretonne*, gant Marsel Guieysse. Dioustu e voen e-touez ar rakprenerien-se. Hag en hafiv war-lerc'h e c'hellan lenn hag azlenn al levr-se, hag a ziskoueze d'in e zeus bet a-viskoaz Bretoned gouiziek ha kalonek.

Hiviziken e ouien a-walc'h evit heulia ha kompren labour ar gwir Vretoned endro d'o Yez. Hiviziken edon prest da dridal gant pennadou entanet an Ao. Perrot. Hiviziken, siwaz ! ne vije mui ken seder va studioù ! Ar re yaouank a vez gloazet doun gant an dislealded. Gwelout peseurt renk a oa dleet, hervez ar Gwir, d'ar brezoneg e bed an deskadurezh, ha rankout, bemdez, rei an holl amzer d'ar galleg, d'al latin ha d'ar gresianeg, a oa d'in eun draen lemm hag a leze em c'halon eur gouli doun ha skuizus.

Na pegen gwir e kaven ar c'homzou-mañ skrivet gant an Ao. Perrot, nebeut a-raok ar brezel diweza :

« Nag a zanvez skrivagnerien a zo bet oc'h ober o zreuz war hor maeziou bet roet d'ezo sperejou eus ar re gaera, gant an Aotrou Doue, ha n'eus chomet war o lerc'h netra, dre ma n'eus ket bet desket d'ezo biskoaz komz, lenn ha skriva, evel ma 'z eo dleet, yez hep par o zud koz !

« Nag a bet Calloc'h a vevas e Leon, Treger ha Kerne, koulz hag e Gwened, hag a zo maro hep beza gelllet skriva war baper al leoriou kaer a oa moulet e goueled o spered !

« Komzet o divije bet d'ar bed a-bez, e brezoneg, hag ar bed a-bez en divije kavet e c'honidegezh hag e levenez ouz o c'hlevet.


« Siouaz ! n'int ket laket e tro d'hen ober. Pebez koll evit ar bed holl ! »

Pa lennen ar pennad-se, edon oc'h echui va amzer kelenndi, ha prest da vont d'ar C'hloerdi bras.

N'anavezen, d'an ampoent, an Ao. Perrot nemet dre e skridou. Ne ouien ket pegement a re all evel doun en doa dihunet ! Ne ouien ket pegement a re all a zihunje c'hoaz, hag a zihun atao eus barr an Neñvou !

An Ao. Perrot a zo bet eun dihunter. Ha m'he deus gelllet *Breiz*, en amzer bremañ, savetei hec'h enor, *Heñ* a zo e-touez ar re a ranker meuli ha trugarekaat ar muia, war-lerc'h *Doue hon Tadou* !

Eur beleg eus eskopti Kemper.



An ao. Perrot dirak e chapel e Kroatkeo.

An Aotrou Perrot, eur sklerijenn hag eur galon aour

Didruez e tro rod an amzer heb paouez ha setu bremañ dek vloaz ma 'z eo aet kuit diouzimp an abad Yann-Vari Perrot. Evelato, ar sonj anezañ a zo chomet ken beo ha biskoaz en hor c'halonou. E gwirionez, n'hon eus ket ezomm eus an dekvet deiz-ha-bloaz-mañ eus e varo evit rei tro deomp da brederia war ar skouer hag ar c'henteliou en deus lezet war e lerc'h goude eur vuhez gouestlet penn-da-benn da *Feiz ha Breiz*.

Eur beleg dilorc'h ha dister ne oa ken, person eur barrez diaes awalc'h da ren, kollet e kreiz menezioù Breiz. Koulskoude, eur sklerijenn en deñvalijenn e oa hag a zo chomet evit ar Vretoned o deus bet an eurvad d'e zarempredi hag, iwez, evit ar re eus ar rummadou da zont hag a fello dezo mont war e roudou.

Galvet gant an Aotrou Doue da vont da beleg, en em roet en deus a galon d'e labour zantel, hogen, e-kichen ar garantez-ze, eun all a oa atao war elum e doun e galon : hini Breiz hag he silvidigezh. Komprenet en doa abred n'en deus ket ar beleg ar gefridi nemeti da zourzial eus eneoù an hiniennou, n'eus forz petra a c'hellont beza. An dever en deus iwez da zontjal en e Vro ha pe vro he deus kement a wir da veza doujet ha graet war he zro eget hor paour-kaez Breiz, dilezet ma 'z eo gant kement eus he bugale, en o zouez, siouaz, re hag a dilefe kentoc'h hentea o breudeur war an hent mat pleustret gant hor re-goz aet da anaon. Gwelet en deus gant lagad lemm ar galon pegen talvoudus ez eo ober gant ar brezoneg ha rei lufr d'ezañ n'eo ket hepken evit ren eur vuhez dereat er bed-mañ met iwez evit mad hon eneoù.

Taolet evez en deus war ar vugale vihan hag an dud deut war an oad na ouient nemet nebeud a c'hallig hag a veze lakaet diaes pa chome ar brezoneg

e toull an nor. E berr-gomzou anat e oa d'ezañ e oa lies-a-wech ken stag an eil ouz egile ar Feiz hag ar Brezoneg ma kave e oa eur fazi bras, lezel da luskat al liammou etrezo ha muioc'h c'hoaz klask o diskoulma.

War an diazez kreñv-mañ pa ne oa c'hoaz nemet eur c'hure yaouank dic'halloud e savas ar *Bleun Brug* en deus goude graet kement a berz hag ar gelaouenn vrudet-ze *Feiz ha Breiz*, hag he deus graet kement a vad d'he lennerien. Kalz a draou-all en deus sevenet met, dreist-holl, gouezet en deus entana eur garantez virvidik evit ar Vro hag he Yez e kalonou meur a hini gant o dougen da labourat evelañ.

Abaoe pell-ze ec'h anavezen anezañ met, pa strakas ar brezel diweza ha pa deuas an Alamanned d'hor bro, n'em boa mui tro d'en em gaout gantañ evel araok. Edo e Skrignak ha me em boa kuitaet Brest evit en em repui gant va zud e Karanteg war ribl ar mor. Eun deiz avad va gwreg a c'houlennas ganen ha n'hellfen ket mont da welout mignoned eus broiou e vefe aesoc'h enno ar vuhez evit kaout diganto eun dra-bennag da zebri. Va mab hag a oa deut da veza klanv d'ar mare en doa ezomm eus eur boued founnusoc'h ha kreñvoc'h eget ne oa posubl da gaout e Karanteg. Ha me o skriva d'am mignon koz ha, dioustu, e kasas d'in-me eur pakad hag a voe deut mat-tre war eun dro gant eul lizer e c'houlenne ennañ perak n'em boa ket en em droet outañ kentoc'h. Setu penaoz ez is a-ziwar neuze, pep sadorn, da Skrignak da gerc'hat va fakad ha, war ar mare'had kaout va lein er presbital. N'ouzon ket avat penaoz em bije gelllet en em ziluzia ken brao ma ne vefe ket bet ken karantezuz em c'heñver.

Gouzout a ran memes tra e oa eur blijadur evitañ n'eo ket hepken va sikour met, ivez, va gwelet ha komz diwarbenn traou Breiz hag ar Brezoneg. Ar wirionez eo ne dlle ket beza plijadurus-kenañ e vuhez d'an ordinal.

Eun dra-all a c'hellan lavarout. Va mab a felle d'ezañ en em guzat war ar maez rak aoun beza kaset d'an Alamagn evit al labour-ret. Yann-Vari Perrot a glaskas neuze eur verouri evit rei bod d'ezañ.

Eun eñvorenn brizius a chomo atao ganen-me, hini va gweladennou da bresbital Skrignak, hini ar-prejou ouz tael vras ar gegin e-kichen ar chiminal mod-koz, hini hor c'haezeadennou diwarbenn ar brezoneg hag e gudennou hag an doareou gwella d'o dirouestla evit brasa mad ar Vro. Kenteliou fur am eus bet evelse digant eun den hag a oa eur mestr war an danvez. Biskoaz n'omp ket bet ken tost an eil ouz egile, ha pa oa ken arvarus ha ken trist stad an traou, ken pounner ar c'houmoul.

Ha pa zonjan ez eo bet lazeta ar beleg kalon-aour-ze gant eun den na ouie ket sur petra 'rae en e gasoni dall, dont a ra adarre an daerou em daoulagad. N'eus forz, gant gras Doue, an den diskiant-ze n'eo ket bet evit laza ar goulou entanet gant Yann-Vari Perrot, ar goulou lugernus-ze hag a ziskouez deomp e tleomp atao chom fidel-beteg ar maro da Feiz ha Breiz, da Feiz ha da Yez hon Tadou.

Per Mokaer.



Bez an ao. Perrot, hirio, e Koatkeo-Skrignak.

PHOTO JOS LE DOARÉ

E koun an Aotrou Perrot

Abredik e meus anavezeta ano an Aotrou Perrot. Goude ar brezel all e oa.

Bep miz goude an oferenn e prenen Feiz ha Breiz digant an Dimezell Mari her gwerze e-kichen dor ar merc'hed. C'houec'h kwennek e kouste d'in.

N'am beze ket a geuz d'am c'houec'h kwennek. Ar c'hontadennou a blijed d'in, ar rimadellou hag an divinadennou.

Dont a raen a-benn da zivinout meur a hini alies. Kas a raen ar responchou d'an Ao. Perrot, ha prizioù am eus bet gounezeta.

Eur wech, soñj mat am eus c'hoaz, e oa distroet va lizer d'in en-dro, hag em boa bet 2 wennek da baea da baotr al liziri : re nebeut e oa timbret va lizer. Feuket e oan bet hag e chomis eur pennad goude hep kas lizer ebet ken d'an Aotrou Perrot.

Deiz gouel an Ao. Guillou, e Kleder, er bloaz 1930 eo e welis an Ao. Perrot evit ar wech kenta.

Va breur bihan a oa bet meulet gantañ evit eur ganaouenn en doa kanet, setu ma skrivas d'ezañ d'hen trugarekaat.

Eur respont am boe digantañ, a reas d'in e-leiz a blijadur.

Diwar neuze e krogas da vat an darempred etrezomp dre liziri.

Eun danevell a gasis d'ezañ, a voe embannet prestik goude e Feiz ha Breiz, ar pez a lakeas ennoun kalz a fouge ha c'hoant brasoc'h c'hoaz da skriva traou all e brezoneg.

Eun hañvez, er bloaz 1931, pedet gantañ, ez is betek Skrignag.

Digemeret evel mab an ti, tremen a ris meur a zervez en e brespital oc'h ober anaoudegez gant Herri Caouissin.

Neuze eo e voe divizet sevel Feiz ha Breiz ar vugale a badas betek ar brezel hag a veze skignet eur mil bennak anezañ dre ar skolioù. An Aotrou Caurel, neuze e Sant-Thegonnee oc'h ober skol, a roas d'eomp ivez an dourn da gas endro ar gelaouennig-se.

Nag a blijadur doun am eus bet o reiza an deverioù a rœ d'ar skolioù Feiz ha Breiz ar vugale ! Nag a liziri kaer deuet d'in digant mistri ha mestrezed-skol ha digant bugale, hag a lakae kalz laouenedigez e buhez poanuis an Aotrou Perrot.

✱

Soñj a meus ivez, eus ar pourmenadennoù a raen gantañ en tro-war-droioù. A-wechoù e pignemp war eur menez hag e tisplege d'in kement tra a welomp ac'hano.

Goude koan e veze lavaret ar pedennoù diouz an noz, a-gevret, en-dro d'an daol, ha warlerc'h e veze eus tamm beilhadenñ dirak eun oaledad tan.

Soñj am eus c'hoaz e tremene kalz tud dre ar presbital, re yaouank dreist holl, o tont a-wechoù eus a bell. Kembreiz am eus gwelet meur a wech en o-zouez.

An holl dud-se, n'eus forz piou e vijent, a veze en e di evel er gêr.

Evit skañvaat labour ar yatez, e rœ d'ezhi alies an dourn da ober n'eus forz peseurt labourioù : skuba, koara, kerc'het dour, dibluska avalou-douar...

Deiz gouel Bleun-Brug Montroulez, her c'havis eur wech diouz ar mintin, hag heñ d'ezañ labour dreist penn gant ar gouel, o riñsa an dour louz, o skuba hag o tiboultrenna an ti.

— Ma ! emezoun d'ezañ, biskoaz kemend-all ! C'houi d'eoec'h da ober herio n'ouzoù ket pet prezegenñ, hag emaoec'h amañ oc'h ober petra !

— O, emezañ, ar pezh am eus da lavaret a zo sanailhet em fenn abaoe pell 'zo ha n'oun ket gwall chalet gantañ.

Souezet-mik e chomis war an deiz ouz e glevout o komz gant kement a aezamant ha kement a dan.

✱

N'ankounac'hain ket kennebeut da veza klevet e Skrignag dirak eun ilizad kadorioù goullou koulz lavaret, sarmonioù eus ar seurt a glever en ilizou-meur deiz ar gouelioù brasa, hag e sonjen eunoun va-unan.

— Mantrus eo e vije lezet eun den ken helavar en eur barrez ken dister... da brezeg evel e-kreiz eur gouelec'h da gadorioù goullou.

Met neket hen eo en dije klemmet da veza dalc'het e Skrignag. N'edo ket o redek warlerc'h an enorioù.

— N'ouzoù ket, emezañ d'in, eun dervez, ar maro a blijfe d'in ar muia ?

— Nann avât, Aotrou Person.

— Mervel en eur prizon en eur lavaret va chapeled.

✱

Mez ar pezh a chomo ar muia garanet em spered, eo diweza pardon Koatkeo an Aotrou Perrot, d'ar 15 a viz Eost 1943.

Edo ar brezel en e wasa.

A bep seurt keleier fall a rede dre ar vro : ar baotred yaouank a yafe d'ar pardon a vefe paket gant an Almanted. Kannou a vefe etre ar vakizarded hag an Almanted. Kirri-nij a deufe da vombezenna an dud... ha me oar-me peseurt diotach all ne vije ket klevet c'hoaz.

Kontet e veze ivez, e teufe archerien da evesaat ouz ar pardon, gant aoun e vefe trouz.

An Ao. Person a glaskas dispenta an dud d'an oferenn-vintin, er bourk.

Pell araok an oferenn-bred e tiskennjomp da Goatkeo. Eun doare-Kermes a oa ivez da heul ar pardon, ha traou a oa da renka.

Edomp a-zevri gant hon labour, pa voe gwelet o tiskenn gant an hent eur strollad archerien : daou-ugent... marteze hanter-kant.

Ouz o gwelout, an Ao. Perrot, prim evel eun tenn, a yeas daveto, luc'hed en e zaoulagad, hag evel Hor Salver dirak marc'hadourien an tempi e lavaras d'ezo :

— Mar demaoec'h o tont d'ar pardon egiz pardonerien, o tigemeran a galon vat, met mar teuit e-giz archerien, e tifennan ouzoec'h lakaat ho treid war zouar an Itron Varia. Me eo ar mestr amañ ha me eo a zalc'ho urz vat el lec'h-mañ.

An archerien, hegarat, a daolas evez ouz ar pardon, met eus a-dreñv an delioù, hag a-vec'h ma voent gwelet e-doug an deiz, nemet eur wechig bennak pa deujont da brena krampoez.

An oferenn a voe kanet er-maez dirak eun daou c'hant den bennak, gant an Ao. chaloni Guivarc'h, an hini a gemero diwezatoc'h stur Feiz ha Breiz. Prezeget e voe gant an Ao. chaloni Per-Yann Nedeleg.

An derc'hent, an Ao. Person en doa lavaret d'in :

— Warc'hoaz, e Koatkeo, e klevi an durzunell.

— Peseurt turzunell ? emezoun.

— Met turzunell an Itron Varia ! Dont a ra bep bloaz da gana da vare ar gorreout !

Edon, d'ar mare-se, beuzet em soñjou santel, pa deuas eun taolig ilin da sacha va evez, hag eur vouez izel o lavarout d'in em diskouarn :

— Ne glevet ket ?

E gwirionez, da heul kloc'hig ar gorreou, tregerni 'rae an draoñienn sioul gant grougouz an durzunell ken 'oa eun dudi.

Alies-alies e teu an daolenn-se em spered abaoe, setu, evel ar sent koz hag o deus pep hini e loen karet, chom a ra turzunell Itron Varia Goadkeo, em spered, unanet gant enñvor an Ao. Perrot.

✱

Goude merenn e voe kanet gousperou war an tonioù bras. D'ar brosesion, dindan pokou an heol, e skedas ar bannieloù hag ar gwiskamanchou ; ar vombard hag ar biniou a sonas kantik Koatkeo, endra ma kane an dud :

« Kristenien ar menez, tostait da glevet,

Penaos eo bet Koatkeo, savet ha dilezet.

Edoug trizek kant vloaz, ti Vari, meur a dro,

A zo bet diskaret hag adsavet en-dro.

Rak Mari, Kristenien, pa gar, a gar a-grenn,

Ha nerz ebet ne c'hell dont anezi a-benn.

Karet he deus Koatkeo, ha bepred her graio

Hag he zron, el lec'h-mañ, da viken a bado. » (1)

Goude ar gousperou, ar yaouankiz a gorllas war ar c'hlazeneun tro-war-dro d'ar chapel, hag ar c'hermes a yeas brao kenañ en-dro.

Pell araok an noz, an Ao. Perrot a glozas ar gouel ha pep hini, didrouz kaer, a yeas d'ar gêr.

Edomp dija tostik da vourc'h Skrignag, pa deuas unan bennak da lavaret :

— Ao. Person, deuit buan d'ar presbital. Kabiten an Archerien a zo eno ouz ho kortoz.

— Delit ! emezomp d'an Ao. Person, en taol-mañ avât emaoec'h o vont da veza laket en toull-bac'h.

Kabiten an Archerien a oa er presbital. Met ne oa ket tres fall warnañ tamm ebet.

(1) Kantig savet gant an Ao. Perrot.

— Aotrou Person, emezañ, digareziou am eus da ginnig d'eoc'h. Graet em eus va dever; ha netra ken... Met digemerit ivez va gourc'hemennou; tro hon eus bet herio da welout eur pardon kaer leun a goanteri hag a urz vat... Kenavo Aotrou Person! ha mepleudi d'eoc'h!...

Ha goude beza kimiadet diouz ar c'habiten, an Ao. Perrot en eur frota e zaouarn evel ma rae alies, a lavaras d'eomp laouen:

— Pa lavaren d'eoc'h, an dud-se a zo gwelloc'h eget na soñjer; a galon emaint ganeomp!

En deiz warlerc'h ar pardon, an Ao. Perrot a bedas an Ao. Guivarc'h ha me da chom gantañ c'hoaz eun dervez all.

Ha ni da chom.

Brao e oa an amzer.

Goude kreisteiz, hon tri ez eomp d'ober eun droiad war ar-maez.

Hor c'has a reas e-kreiz eul lanneg war eur menez, e-skeud eur roc'h vras e-mesk ar brug.

Eno e komzas d'eomp hir amzer. Merzout a rejomp neuze pegement e c'houzanve ar beleg paour-se! Pegen darbare e oa gant e barrez a chome ar bras anezi re bell diouz Doue! Glac'har spontus en doa o soñjal en e Vreiz, o welout an divrezonega oc'h en em astenn, hag e labouriou o tougenn ken nebeut all a frouez... N'en doa espernet koulskoude, nag e amzer, nag e boan, nag e arc'hant... Taolet en doa had forz pegement war an añchou en doa troet ha distroet ha glepiet gant e c'houezenn...

Mankout a rae warno e wad!... Gwad ruz ha glan eur merzer!

Antronoz e welis anezañ evit ar wech diweza.

Savet e oa abred-abred, rak bez e tliemp kemer an treñ beure mat hag ober peder leo war hon troad da vont betek an ti-gar.

Edo en hon raok er sakreteri o pourchas an dilhad oferenn.

Echu ganeomp an oferenn, her c'havomp adarre er gegin. Kafe tomm a oa dija gantañ. Bara ha bolennou hor gortoze war an daol.

Ha ni d'ober gourdrizou d'ezañ:

— Penaos! c'houi hag a zo ken skuiz, perak ez oc'h bet savet ker mintin all!

— N'hellen ket, evelato, ho lezel da vont kuit hep tamm!...

Kenta 'welis goude an Ao. Perrot eo en e arched, e-keñver an galed-se el lec'h m'en doa tommet d'eomp bep a vanne kafe.


Edo eno, gwisket gantañ e zilhaf oferenna, evel ma vije o tiskenn eus an aoter goude e oferenn ziweza.

E oferenn ziweza e gwirionez, ha bet eo enni, er memes amzer, heñ e-unan, ar beleg hag ar « viktim ».

Goude rei e amzer, e arc'hant, e aezamañchou, e vrud-vat zoken, bet eo ar c'hiunig diweza-mañ, evel ar gorreou eus oferenn e vuhez.

Plijet gant Doue digemer gant madelezh, ar c'hinnig diweza-se a reas, eus e gorf hag eus e wad evit ma skedo Feiz ha Breiz, bepred kaeroc'h-kaera, war zouar an Arvor.

Visant Seite.



Dirak arched an ao. Perrot e Koatkeo.

Levenez en Nenv

D'eoc'h, va Zad, e karantez Doue ha Breiz:

Fanch STEPHAN.

E Baradoz Doue, petra zo a nevez?

P'emañ holl Sent hor Breiz bodet gant levenez
War o dremm dudius eur mousc'hoarz ken laouen
Peseurt lidou, bremañ, emaint holl o kempenn?

Pa vez tud an douar a-wechou o leñva
E vez er Baradoz gouelioù euz ar c'haera.
Raktal hirio, e-kreiz eun deiz a viz Kerzu
E tired Sent Hor Breiz, a bep korn, a bep tu.

Sant Erwan, Sant Herve, ganto Sant Kaourintin
A zo e C'houel hirio: eur gouel kaer ha lirin!
Sant Padarn, Sant Malo, Sant Pol, Sant Gwenole,
Sant Brieg, Sant Samson, Sant Tugdual ive.

Gant an holl Elez-Glan e splannder an Nefvou,
E teu Sent hor Breizig, bremañ, holl a verniou
En o zouez, goulskoude, Mamm hor Breiz Divarvel,
Hor « Mater Patriæ » a zo ouz o gervel.

Met setu an Elez e sklerijenn Doue
O lakaat ober hent d'eun Itron a zoare
Ker splann ma ne c'hellfe hon daoulagad tud veo
He gwelet hep dalla: Itron Varia Goat-Keo!

Da heul hor Gwerc'hez Sakr, holl Sent hor Breiz-lzel,
Euz lein ar Baradoz, a wel barz an dremwel,
Eun Ene o sevel: Ene Kristen Breizat!
Ene glan eur Beleg: Yann-Vari Perrot mat!

.....

Setu hor Mestr karet bet e Sant Kaourintin,
 Diou leo diouz bourc'h Skrignak, abred diouz ar mintin,
 O laret er Chapel, kuzet er prajou glas,
 Oferenn Gouel ar Sant... e ziweza, siouaz !

Edo war hent ar gêr : Trumm ! eur muntrer euzus
 Eus a douez al lann, e-lec'h ma oa e kuz,
 A zailh, a laosk daou denn : O muntrer divalo !
 Kredi, d'eur seurt Beleg, rei taol yud ar maro ?

D'ar paradoez e nijas Ene ar Stourmer koz
 Evel eur goulmig wenn, da liorz ar Baradoz.
 E traoñ Chapel Koat-Keo, emañ toullet e vez ;
 Warnañ, da zaoulina, e tired Breiz a-bez.

Merzer Kenta hor Breiz, en amzer a vremañ,
 Grit ma vleunio hor Bro 'vel gwechall, 'n he c'haerañ.
 Pedit 'vit ma teuo da skedi en hor Breiz,
 Gant doujañs d'hon Tadou, ar Brezoneg, ar Feiz !

Eus lein ar Baradoz, kasit d'eomp ho sikour.
 Evit ma kendalc'himp, garit kalon, ho labour,
 Goulennit gant Doue ma roio d'eomp ar Peoc'h,
 Hag ivez ar c'hras veur da vont eun deiz ganeoc'h !

Fanch Stephan,
eus Kastel-Paol.



*Nebeut a-walc'h a amzer goude beza savet ar werz-mañ, hor mignon Fanch
 Stephan, dastumet gant an Almanted, a rae ive kalonek, evel an Ao. Perrot, ar
 sakrifis eus e vuhez. Herio fizians start hon eus, emañ unanet gant an Ao. Perrot,
 e gloar ar Baradoz.*



A dreuz Skridou an ao. Perrot

Pedenn an Aotrou Perrot evit Breiz

« Breiziz, pedomp a galon ma vo adsavet Breiz,
 « En he c'haer, evel gwechall, gant he yez hag he Feiz.
 « Hep Feiz kristen, er broiou n'hell beza urz ebet.
 « Hep brezoneg ken nebeut, n'hell beza Breiz ebet. »

Y.-V. PERROT.



An Ao. Perrot oberour « Buhez ar Sent »

*Setu amañ eun tañva eus ar pennadou kentelius a gaver berniet el levr
 talvoudus-se :*

« Ar verzerien, dre garantez evit Jezuz-Krist, o deus kollet o madou ho roet o
 buhez.

Diskouez a raent o c'harantez, n'eo ket hepken dre gomzou, met dre oberou.

Hizio ez eus e-leiz a dud, a gav eo eun enor evito, dougen an ano a gristen ;
 arabat avât, goulenn diganto, en dizro, diskregi eus an distera peadra na dioueret
 an distera plijadur, rak ne raint ket.

Arabat gortoz diganto rei an dourn da skigna rouantelez Jezuz-Krist : an dra-se,
 emezo, ne sell ket outo.

Karet a reont Doue, koulskoude, da vihana keit ha ma ne goust netra ar garantez-
 se d'ezo.

C'hoant o deus da vont d'ar Baradoz koulskoude, gant ma ne vezo ezomm da
 gemeret poan ebet evit mont e barz.

N'eo ket kristenien en doare-se eo a glask Jezuz-Krist. Ret eo gouzout beza
 d'ezañ korf hag ene, er blijadur hag en dristidigez, er vuhez hag er maro, d'ezañ
 hep paouez hag hep distag.

Lakât kement hon eus en hor c'horf a nerz, en hon ene a sklerijenn hag a
 garantez, da dalvezout evit e c'hloar.

En eur gêr : e pep tra, e pep lec'h ha bemdez, **REI** hag **EN EM REI.** »

Rei hag en em rei ! ha n'emañ ket aze penn-da-benn, buhez an Aotrou
 Perrot ?



An Aotrou Perrot ha Landevenneg

« ... Eur wech trec'het an Normaned, ar Vretoned, evit diskouez o anaoudegez
 vat, a roas dourn d'an Abad Yann da adsevel manati Landevenneg, devet er bloaz 914,
 en eur rei d'ezañ gwirioù, ilizou ha parrezioù a-bez, a leve... »

Klevet a reomp lavaret eo'h adsaver abati Bod-Gwenn, e-kichen Plenée-Jugon,
 hag Bon-Repos, e-kichen Gouarec ; eul levenez vras e vefe evit Breiz a-bez, ma
 c'hellfed staga ivez, evel bremañ mil bloaz, da adsevel abati Landevenneg, kosa hini
 Breiz-Vihan, evit ober anezañ eur gwir vanati breizad... »

(Y.-V. PERROT e Feiz ha Breiz miz Eost 1937.)

*Eus ar Baradoz, e tle an Ao. Perrot tridal, o welout eo deuet e c'hoant
 da wir en deiz a hirio. Emaer staget da adsevel abati Landevenneg.*

An Aotrou Perrot adsaver chapeliou

(Evit kloza e bez-c'hoari « Distro laouen an Itron-Varia da Goatkeo », an Ao. Perrot a lavar kement-mañ) :

...« Da hanter-eost a zeu e vezo graet ar pardon nevez kenta amañ (e Goatkeo). E-kreiz al labouriou bras e tigouezo, met en deiz m'en em gav gouel ar vamm, ar vugale ne labouront ket.

Ni a gano an oferenn etre peder moger hanter gouezet ho chapel goz, hag e c'hellloc'h daoulina war ar vein c'hlas m'eo bet daoulinet warno e-pad kant-vejou ha kantvejou ho tud koz gwechall.

Hag ar Werc'hez a vezo douget neuze eus Skrignag da Goatkeo, evit ar wech kenta, e-kreiz an enoriou hag ar meuleudiou.

A-nevez e tiskennno an Itron-Varia da gemeret perz en he leve...

Ho Kwerchez a zo eur rouanez, rouanez an Neñv hag an douar; ar gurunenn arc'hant a zoug war he zal a zo lugernus, met ar bugel-Doue a zoug war he barlenn a zo kaeroc'h c'hoaz. Mamm eo kentoc'h eget rouanez; rouanez eo dre ma 'z eo bet mamm da genta...

O! beleien amzer an Dispac'h hag a oa amañ bremañ ez eus seiz ugent vloaz, c'houi, Aotrou Bernard, person Skrignag, Aotrou Koz, person Poul-laouen, Aotrou Jegou, person diweza Goatkeo, nag a nerz a gavech oc'h oferenna amañ, e-harz treid an Itron-Varia, evit dougen betek penn ar groaz a goueze ken pounner war ho tiouskoaz hag ar gurunenn spenn a sanke he drein ken doun en hoc'h empenn.

Nag a wech, Aotrou Bernard, araok mervel e prizon Kemper d'ar 17 a Vezeven 1793, ho peus savet ho taoulagad, beuzet en daelou, warzu Gwerchez Goatkeo.

Ha c'houi Aotrou Koz, p'edoc'h o pignat war ar chafod, e-tal Kastell Brest d'an 13 a viz Meurz 1794, ha pa hopec'h, araok lezel ho penn da goueza, dindan kontel ar c'hilhotin, anioiu Jezuz ha Mari, daoust ha ne droec'h ket ho sellou doanief war-zu chapel didrous ha Gwerchez vat Goatkeo hag he Mabig bihan?

O! Aotrou Jegou (c'houi hag e voe kavet ho korf maro war c'hlazenenn an hent). O! testou bras Hor Salver Jezuz-Krist, c'houi hag a varvas ho tri kentoc'h eget nac'h feiz hon Tadou koz, Itron-Varia Goatkeo he deus gouezet ho tigoll brao bras, da veza gouzanvet kemend all a drubuilhou hag a boaniou dre garantez evit he Mab...

Ha c'houi holl, tud vat hag a zo o relegou amañ e douar benniget an Itron-Varia, o c'hedal deiz ar varn, kouskit e peoc'h. Ar bedenn bet ehanet amañ e-pad 37 vloaz, a savo a-nevez e-tredek an Neñv, hag a gouezo goudeze evel gliz da viz Mae evit brasa mad ar re veo hag ar re varo!

Ya, Rouanez an Neñv, bezit laouen, Alleluia! rak ho Mab hag a oa maro a zo savet eus ar bez leun a vuhez, hag ho ti hag a oa kouezet en e boull, a vezo adsavet adarre kaeroc'h eget biskoaz ».

D'ar 15 a viz Eost 1933 eo e tistroas ar Werc'hez da Goatkeo hag e voe eno lavaret a-nevez an oferenn gant an Ao. Jegou, niz-bihan an Ao. Glaoda Jegou diweza person Goatkeo.

D'ar 15 a viz Eost 1937, da Geñver milved bloaz adsavidigez Breiz, e voe benniget ar chapel gaer a weler hirio hag a vir bremañ e skeud he mogerioù, beziou an Aotrou Jegou hag an Aotrou Perrot, bet drouklazet o daou.

P'edo an Aotrou Perrot o sevel bez an Aotrou Jegou, edo pell diouz soñjal, moarvat, e oa eur verzerenti dem-heñvel ouz e c'hortoz war unan eus henchoù Skrignag, hag ez afe e gorf da ziskuiza e-keñver bez e genvreur merzer.

Gouzout a reer, en doa c'hoaz, an Aotrou Perrot, renket e nevez chapel Sant Korantin Skrignag el lec'h ma lavaras e oferenn ziweza er bed-mañ.

Gant gwir abeg e c'heller lavaret eta, eo bet eun adsaver chapelioù.

Ma vije bet kalz beleien eveldañ e vije bet kouezet nebeutoc'h a chapelioù kaer en o foull evel ma weler bremañ.



An Aotrou Perrot, abostol Breiz

... C'hoant am eus ec'h anavezfe an holl Vretoned, pegen uhel eo o gouenn, pegen kaer eo o yez, pegen dudius eo o bro; youl am eus kement ha ma c'heller kaout da welet va c'henvroiz o lavaret gant lorc'h ez int Bretoned, eus Breiz-Izel hag e ouezont mat ar brezoneg.

Ne glaskin ket, e doare ebet, bresa gwirioù ar C'hallaoued; Doue hag an amzer o deus hon lakat da veza amezeien; ret eo d'eomp eta en em glevet, n'eus ket da lavaret nann.

Ma ne vefe ket breset muioc'h gwirioù hor gouenn, hor yez hag hor bro, gant ar C'hallaoued, eget ne vez graet re ar C'hallaoued gant ar Vretoned, neuze, an diou bobl a en em glevfe evel m'eo dleet, hag e rofent o dourn an eil d'eben, a galon vat, da vont war-raok, war wellaat ha war binvidikaat e pep doare, ar pezh a zo va mennoz, ar pezh a glaskin hag a glaskin bepred hep klask netra ken...

Ar poblou a varv evel an dud. Pobl Vreiz n'eo ket maro koulskoude c'hoaz, mez war-nes mervel emañ...

Mantrus ha doanuis eo kement ha ma c'hell beza. Gwella pezh a zo n'heller ket barn an den keit ha ma vez buhez ennañ.

Eur bobl ivez, KEIT HA MA NE NAC'H KET HE DOUE HA KEIT HA MA VIR HE YEZ, a zalc'h en he daouarn an alc'houez a lakaio he chadennoù da goueza abred pe ziwezat, hag ar Vretoned evit c'hoaz n'o deus ket nac'h et ar C'hrist. Doue o Zadou, nag o yez, ar brezoneg, setu ma c'heller c'hoaz kaout eun eulfennig a fiziañs en o amzer da zont.

Ar pezh a zo bet dec'h, daoust ma n'emañ ket hizio, a c'hell beza warc'hoaz.

E-lec'h fallgaloni, poaniomp eta !...

(Y.-V. PERROT, F. ha B. 1907.)

... Evidomp-ni, Bretoned, hag a zo stok ouz ar C'hallaoued, eo eun dra vat gouzout galle evel ma 'z eo eun dra vat d'ar C'hallaoued a zeu e Breiz, gouzout brezoneg; met n'eo ket eun dra vat hepken eo d'eomp-ni gouzout brezoneg, eun dra ret eo, rak an enor da veza Bretoned a zo eun enor ha n'eo ket roet d'an holl boblou. Bezomp eta Bretoned penn-kil-ha-troad, kement ha beza.

(Y.-V. PERROT, miz Du 1930.)

HAG ABOSTOL FEIZ HA BREIZ

... Bretoned, ma n'hon eus ket a c'hoant da veza beuzet er mor a hudurnez hag a yudazerez a venn goueledi Breiz da heul ar broiou all, krogomp mat ha raktal en daou skourr ha ne dorrint ket, en daou skourr yao'h ha glas, a welomp c'hoaz oc'h en em astenn a-us d'hor penn : skourr ar **FEIZ** ha **SKOURR BREIZ**. Er skourrou-se, hag er skourrou-se hepken emañ skourrou ar zilyidigez evidomp.

(Y.-V. PERROT, miz Here 1936.)

WAR ROUDOU HON TADOU

... Tud vat, livirit d'in, ha gwir eo ez oc'h Bretoned ?...

Ha ne gav ket d'eoc'h neuze, Bretoned, va breudeur, e kollfec'h ar pezh hoc'h eus a wella, ma ehanfec'h da bleustri an hentchoù o deus pleustret en ho-raok, ho Tadou ?

Ha ne gav ket d'eoc'h, e vefe ho Preiz, disheñvel a-grenn diouz Breiz ho Tadou, ma ne vefe ket komzet brezoneg enni ken, hag e kollfemp an darn vrasa eus hor perziou mat da heul hor brezoneg ?...

Ha ne gav et d'eoc'h, mar fell d'eomp a grenn mirout hor yez, e vefe ret digeri raktal, holl skolioù Breiz d'ar brezoneg, ma ouezo holl vugale Vreiz, pelloc'h, komz, lenn ha skriva yez o zadou ?...

Bretoned, va Breudeur, mar fell d'eoc'h kement-se, e kerzoc'h war roudou ho Tadou, hag e lakeoc'h deizioù laouen, skedus ha santel da darza war ho pro, laouenoc'h, skedusoc'h ha santeloc'h eget re ar c'hantvejou diweza tremenet... En ano an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. Evel-se bezet graet.

(Y.-V. PERROT, 10-8-29.)



An Aotrou Perrot ar poanier

« ... Daoust d'an niver bihan m'omp bet, ha d'an nebeut a harp hon eus kavet e-touez hor c'henvroiz, ha d'an avel da wail c'houeza a-wechou en hon eneb, hon eus graet eun draig bennak evelato.

Torret ha munudet hon eus an douar ; e c'hlepiet hon eus gant hor c'houezenn ; had hon eus fuitket warnañ ; ma kar Doue fuitiha e heol hag e c'hliz war hon labour, hon labour a zougo frouez.

Deuet omp a-benn da lakaat hor mennozioù da veza sklêr evel dour-stivell ; gwe-lout a reer bremañ mat, pa gerzer a-eneb an heol, lagad ar goulou, ar pal a fell d'eomp tizout : miret da Vreiz e ene kristen ha breizat, hag ar pal-se, ma n'en-tizomp ket hon-unan, re-all, war hon lerc'h a gendalc'ho hon ero... »

(An Aotrou Perrot a skrive kement-se e Feiz ha Breiz miz Du 1930, da Geñver pempet bloavez-war-n'ugent ar Bleun-Brug.)

A-benn daou vloaz, da geñver an eured-aour, hon devezo tro alies da zisplega labourioù poanier ha talvoudus Tad ar Bleun-Brug.)

::::

Da geñver gouel Sant Korantin 1930, pa errue e Skrignag, e vignon « Gour-na-Gil » a zisplege d'ezañ kement-mañ :


« Prest oc'h atao da zifenn, ouz tud fall ha direiz,
Hor Breiz hag hor Brezoneg, hor gizioù hag hor Feiz,
Evit reiza eun pep tra, ha difenn hor yez koz,
'Vez bepred lemm ho pluenn ; ho teod ne vez ket sôz.

E-pad pemp bloaz war-nugent, ho torn war an alar,
Hoc'h eus en hor Breiz-lzel, daoust d'ar boan, d'ar c'hlaç'har,
E-kreiz tommder an hañvou, ha skouladoù ar c'hrug,
Digoret kalz a añchou, ma vleunje ar Bleun-Brug.

Eul labour didalvoudus evit dastum madou ;
Met kalz gwell eo beva paour hag heulia hon Tadou.
Derc'hel bepred evelto, daoust da skilfou pep bleiz,
Birvidik en hor c'halon, karantez « Feiz ha Breiz ».

Neb a labour eviti chomo ket dizano,
Met e-pad ar c'hantvejou e vleunio e ano.
'Vit kizellat hoc'h hini, bugale Breiz-lzel,
A ranko kas da aoura, hep mar, beg o c'hizel... »

(12-12-30 Gour-na-Gil.)



An ao. Perrot o prezeg e-kreiz
dismantrou Landevenneg.

Prezegenn an aotrou 'n Eskob Duparc da anteramant an aotrou Perrot

« Je viens prendre part à votre deuil, et je commence par vous dire l'horreur que m'inspire, comme à vous-mêmes, l'assassinat dont **votre dévoué recteur** vient d'être victime.

L'homicide est un crime, quand il n'est pas un acte régulier de la justice humaine. Dieu nous a dit : **« Tu ne tueras pas »**.

Le meurtre accompli dimanche à Scrignac, au sortir de la messe, est un de ces actes que la conscience humaine condamne formellement dans le monde entier.

Je plains la famille du **bon Monsieur Perrot** et je partage sa tristesse.

Je plains également la paroisse de Scrignac, qui avait en lui un **Pasteur plein de zèle et d'intelligence, un prêtre qui n'a jamais reculé devant l'accomplissement des devoirs de son ministère.**

Son esprit élevé, sa science sacerdotale, sa connaissance parfaite du breton, son éloquence dans les deux langues, lui assuraient une autorité et une influence que vous avez tous constatées.

Je lui rends le témoignage qu'il remplissait consciencieusement toutes les obligations de sa charge. Il avait une passion ardente pour la cause bretonne qu'il aimait à soutenir dans sa revue **« Feiz ha Breiz »**, dans ses articles culturels, dans le Congrès de son **« Bleun-Brug »** et jusque dans sa belle **« Vie des Saints »**.

Mais s'il aimait la Bretagne, il servit loyalement la France, avec un esprit de sacrifice aussi patriotique que sacerdotal et je connais des blessés qui lui ont gardé une profonde reconnaissance pour les soins qu'il leur a donnés sans se lasser.

Voici d'ailleurs une citation qui prouve assez sa vaillance :

« Perrot Jean-Marie, brancardier au groupe des brancardiers divisionnaires 40, s'est présenté comme volontaire pour évacuer sur brouette un blessé urgent, sur une route très violemment battue par l'artillerie et malgré les gaz toxiques, il a réussi à accomplir la mission dont il était chargée. »

Je prierai de tout cœur et avec confiance, pour le repos de son âme.

C'est une chose effrayante d'être jeté brusquement devant le Tribunal du Souverain Juge.

Monsieur Perrot y était préparé.

Il venait de dire la Sainte Messe dans laquelle il avait prié de toute son âme pour vous, pour ses parents, pour la Bretagne et pour la France. Dieu lui aura fait bon accueil, comme à un serviteur fidèle.

La Sainte Vierge, dont il a ranimé le culte et **restauré la chapelle de Coatquéau**, lui a porté secours, à l'heure du sacrifice suprême.

Sainte Anne et Saint Yves étaient là, et tous les vieux Saints de Bretagne, pour l'aider à franchir le tunnel de la mort en offrant ses souffrances pour le relèvement du pays. »

Buhez an Aotrou Perrot

Deiz pe zeiz, buhez an Aotrou Perrot, a-dra-sur, a vo skrivet, gant unan bennak eus e ziskibien, en eul leor founnus.

Da c'hortoz, setu amañ eun diverra anezi da lakaat en ho memor.

✱

Ganet eo bet d'an 3 a viz Gwengolo 1877, ha mab e oa da Yann-Vari Perrot ha da Loeiza Leskob, o chom e Keramaze, e parrez Plouarzel e Bro-Leon. Ar seizvet bugel e oa er familh.

Evel e dad, e voe anvet Yann-Vari.

Badezet eo bet gant an ao. Bodénès, kure ; da baeron en devoe Loeiz Gouzien, ha da vaeronez Mari-Jan Jaouen.

D'ar 5 a viz Mae, allaz ! e kollas e vamm.

Diwar neuze, Yann-Vari a vo savet gant eur c'hoar d'e vamm-goz, e Ker-brieg e parrez Lanrivoarc, e ti Yvon Krogenneg.

D'e seiz vloaz ez eas d'ar skol.

Pa zilojas Yvon Krogenneg da vont da Vendrege e parrez Lokmaria-Plouzane, Yann-Vari a yeas d'e heul. 11 vloaz en devoa neuze.

Prestig goude ez eas d'ar skol da di ar Frered da Wengamp, el lec'h m'en doa eun tonton e-giz rener.

« Amañ, paotr, difenn a zo gomz brezoneg ! » a lavaras d'ezañ e eontr koz.

Ha setu neuze kavet e hent gant Yann-Vari. Beleg e vo, hag da heul ar **Feiz**, e tifenno **Breiz**.

Eus Gwengamp ez eas da gendalc'h e studiou, e kloerdi Bihan Pontekroaz, epad c'houec'h vloaz.

Bloaz soudard a reas e Brest, en 19^e rejimant.

Er c'hloerdi Bras, e Kemper eo bet rener ar skol vrezonek, e-pad daou vloaz.

D'ar 25 a viz Gouere 1903 e voe beleget, hag e lavaras e oferenn genta deiz gouel Santez Anna Paotronez Breiz.

Daou-ugent vloaz goude e lavaro e oferenn ziweza deiz gouel Sant Korantin, Patron an eskopti.

Goude eun nebeut miziou e parrez ar Forest-Landerne eo anvet kure e Sant-Nouga e Bro-Leon. Eno e chomo eus 1904 da 1914.

E 1905 e savas eno, e maner Keryann, ar **Bleun-Brug**, evit difenn gwiriou Breiz.

Dont a reas da veza rener « **Feiz ha Breiz** » e 1911. N'en devoa neuze nemet 33 vloaz.

Karout a rae e vicher a veleg a greiz e galon ; ar c'han-iliz a blije d'ezañ dreist-holl, ha sevel a reas eul laz-kana en e barrez.

Buhez nevez a roas da bardon « Sant Yann a laboused », e Sant-Nouga.

Sevel a reas evit e re yaouank, eur patronaj nevez, a voe ennañ c'hoariet e-leiz a beziou-c'hoari brezonek.

Pell araok ar « J.A.C. » en devoa e gele'h-studi.

Eur prezezer helavar eo bet.

Mat e oa ouz ar paour. Aet eo bet betek rei d'ezo e roched diweza.

✱

E 1914, an ao. Perrot a zo anvet da gure e Sant-Tegoneg.

Kenta 'ra eo sevel eur patronaj, hag eur strollad anvet « Arzao Paotred Sant-Tegoneg », n'o devoa ket o far da zibuna peziou-c'hoari.

Distrei a reas eus ar Brezel-Bras, gant ar groaz a enor war e vruched.

✱

Eus 1920 da 1930 eo bet kure e Plougerne.

Lakaat a reas eno war-sao « Paotred Dom-Mikael an Nobletz ». Peziou-c'hoari niverus a skrivas evito.

Dre ma teue ha dre ma 'z ae e veze aketus da selaou an dud, evit gellout evelse pinvidikaat e c'heriou.

Bep bloaz, e Lesneven, e veze karget da ren retrejou ar baotred yaouank a yae da soudard.

Kas a reas dre ar parrezioù ma labouras enno, n'ouzoun ket pet paotr yaouank d'ar c'hloerdi-Bras.



E 1930 eo anvet da berson e Skrignag. Deiz gouel Sant Korantin e kemer ar garg eus e barrez nevez.

Evit ésaat d'e barrezioniz dever ar sul, e savas d'ezo en-dro o chapelioù kouezet : Sant Korantin, Sant Nikolas hag Itron-Varia-Koatkeo.

Chapel Koatkeo a chomo e savadur kaera. Merka 'ra milved bloaz adsavedigez Breiz goude an Normaned : 937-1937.

Mervel a c'helle bremañ : edo savet gantañ e vez.

66 vloaz en devoa p'eo bet diskaret war hent Sant Korantin.

Eur vuhez leun, « eün evel an tenn » hen diskaras eo bet e vuhez.

Doue 'ra bardono d'e anaon.

V. S.



EUN DEN A ZOARE

Teñval-sac'h eo an noz, ha fall-du an amzer.

Luskellet gant ar gorventenn, kousket mat eo ar Person, en e brespital serret kloc'h.

Taolioù pouinner war an nor...

Prim emañ an ao. Perrot war-sao : Goulenn a zo d'ezañ da vont da welat eur c'hlañvour pelli-pelli er menezioù.

Goude mil boan, dre henchou louz eo'h erru e goueled eun draonienn zoun.

Eun ti a zo eno, tud ennañ o chom, tud paour.

Ne vezont ket kalz war-dro an iliz.

En eur gwele kloc'h emañ an tad-koz, gwall-glañv abaoe pelli 'zo.

Tostaat a ra outañ an ao. Person, ha chom gantañ eur pennadig mat.

E-keit-se, e bried he devoa c'houezet war an oaled eun tamm brao a dantad-lann, a sklerijenne an ti a-bez.

An ao. Perrot a oa warnes mont kuit pa lavaras d'ezañ ar vaouez koz tostaat ouz an oaled da sec'hi e zilhada ha da zastum eun tamm tommder araok mont en hent.

A-grêiz m'edo oc'h en em domma sioulik, ar c'hlañvour a lavaras d'ar wreg :

— Mari, piou eo ar beleg-se hoc'h eus kaset d'in ?

— An aotrou Person ! Ma ! fei ! eun den a zoare eo !



An ao. Perrot, e-unan, eo a gontas d'in an danevell-se, ha lavarout a reas ouspenn :

— Ma ! Bez e c'heller kaout trubuilh ha poan en eur barrez evel houmañ, met traou evelse a ra d'it plijadur evelato.

Y. M.

EVIT KLOZA

Huñvreet hon doa sevel ivez d'hon aotrou Perrot muia karet, « eul levrig a zoare », da verka 10^{re} bloavez e varo.

N'ouzomp ket ha deuet omp a-benn.

Da vihana, diwanet eo al linennou-mañ diwar eur garantez down, eur gwir zoujañs hag eur c'hoant start da ziskouez hon anaoudegez vat d'an hini a zo bet hag a chom da veza evidomp bepred tad hon eneo.

Da heul al levrig-mañ, e kemennomp gant joa, eo deuet ivez er-maez, savet gant Herri Caoussin hag e vreudeur, eur film war oberenn-veur an ao. Perrot : ar « Bleun-Brug ». Al labour en deus goulennet digantañ ar film-se, eo en deus miret ouz Herri da skriva amañ ar pennad edomp o c'hortoz digantañ.

Evel m'hon eus graet, an aotrou Perrot n'eo ket ha ne vo ket ankounac'haet.

Dre zoujañs evit an ao. Perrot e lezomp evit miz Geñver an holl geleier hon devoa da lakat en niverenn-mañ.

Gwerz diwar-benn maro an Aotrou Perrot

War eun ton koz.



Didostait holl da glevet, Bretoned a bep stad, Ar



gwalleur-zo c'hoarvezet, Er vro-mañ gant hon Tad.

Didostait holl da glevet,
Bretoned a bep stad,
Ar gwalleur 'zo c'hoarvezet
Er vro-mañ gant-hon tad.

E parrez Skrignag ' veve
Eur person leun a feiz :
Gant Doue 'mañ e ene,
E gorf e douar Breiz.

Gant tud kriz ha digernezh,
Gant torfetourien yud
Drouklazet ' voe didruez,
Siouaz ! 'vel eul loen mut !

Da zeiz gouel Sant Kaourintin,
D'eur chapel, war ar mêz,
'Oa êt, 'bret diouz ar mintin,
An aotrou Perrot kêz

Da laret e oferenn
En enor d'ar Zant bras,
Da gas da Zoue pedenn,
Da c'houlenn start ar c'hras

Ar c'hras evit Breiz-lzel
'N he zao da zevel c'hoaz,
Pa 'z eo lakêt ken izel
Ha goapêt gwasoc'h-gwas.

Pa voe, gant e varchigod,
O tont d'ar gêr, eun tenn
A strakas hag eur bolod
Hen tizas 'kreiz e benn.

Ha setu war an douar
Diskaret, 'n eun taol krenn,
Ar beleg mat ha klouar
A boanias têt ha tenn

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697





An ao. Perrot en e arc'hed digor d'an 13-12-53.

(Tresadenn gant Langleiz.)



Gwerz diwar-benn maro an Aotrou Perrot

Da virout d'e genvroiz
Pinvidigeziou Breiz,
Da fennel kuit diouz langiz
Hor Brezoneg, hor Feiz.

Bet eo bet eur gwir zoudard
O stourm pa veze dao,
Met muntret gant eun trubard
N'emañ mui en e zao.

Eus palez kaer Hor Zalver
E-lec'h m'emañ ar Zent,
Her c'hlevomp ouz hor gelver
Da ziskouez d'eomp hon hent.

« Da benn kit gant an ero »,
Emeañ d'eomp bepred,
« Ken kalet hag an dero
« Deoc'h beza a vo ret.

Mouez têt hor mignon ' glevimp
Ha neuze, hep damant,
Gant kalon e sevenimp
Gwir bal e destamant.

Ha Doue, hor gwir Aotrou,
Moarvat hon digollo
Hag a rento o gwiriou
D'hor Feiz kêr ha d'hor Bro.

Ritian.